

SON  
481 B

# AR BIGOUDENNED

Me z'a d'ober eur ganaouen,  
P'am euz paper, liou ha pluen,  
Da dud Pont-n-abat, Plogastel,  
Daou ganton braz a Vreiz-Izel,  
Elec'h ma zo bigoudenned  
Gant ho goazed montobaned. (1)

Touez ar bigoudenned ive,  
A veler kalz kizou neve,  
Ha marteze ve mad diouall  
Ouz ar re anezho zo fall,  
Pa na veler ket o virvi  
Ann dour morse gant koanteri.

Ho zud koz ma zeufent an dro,  
A ve sabataret hino.  
Ho bugale, d'euz troket kiz  
Michans, da blijout d'ar bourc'hiz,  
Ha troket fesont d'a veva,  
Da gaout digarez da eva.

Ar bigoudenned da vragal,  
Ar bleo' zestum divar ho zal,  
Dindan koeffou-bleo alaouret,  
Ar re zo vil a ve kuzet,  
Re brenet d'ar pardon, d'ar zul  
'Ziskouezont gant taledenn dul.

Var ho fenn giz eur glipennik,  
Zo eur c'hoz tamm bigoudennik  
Ho dillad all gant ar bordou  
A dol skeud var ho diou chotou,  
Ha c'hoaz ann dra-ze n'eo netra.  
Ouz ann traon int kalz ar brava.

Gand ho zeir pe bedir lostenn,  
Int teo evel eur varikenn,  
Mes evia' lod eo tromp-lagad  
P'ar pe dez caout eur gotillon vad.  
Ar bordou all zo var plegou,  
A vechou var dammou truillou.

Lezomp anezho da vragal,  
Gant ho dillad da vad da fall.  
Evit komz euz ar pardonniou,  
Ar marc'hajou hag ar foariou,  
Elec'h ma ve bigoudenned  
Fichet da blijout d'ar voazed.

Ar voazed' gredomp ve ive,  
Fichet dont da leuriou neve,  
Siret gant-ho ho bouteier  
Gant-ho dillae ve bordet kaer  
Sigarenn pe bibenn er beg  
O tustaga bommou galleek.

Var ann tok pedir voulouzenn,  
Evit plijout d'ar vigoudenn,  
Chadenn ha mont euz ar c'hoste  
Abalamour n'eo eur giz neve.  
Ne d'eo ket dont d'ar gear abrad  
Ema ar mont gant ar beded.

Sellet a ve euz ar montchou  
Goude a ve gret signalou  
D'ar merc'hed a vont a vandenn  
Da glask bep a vevad melen  
Ha na yen ket azezet mad,  
Ve dira-z-ho eur voutaillad.

Setu' maint en hostaleri  
Ha dira-z-ho bep a hini :  
« Evomp ama bep a vanne,  
« Merc'hed; demeurez ann hini kre  
« Ha goude ni gomso laouen  
« Peb hini euz be vigoudenn. »

— « Dran-doue, merc'hed, n'hellompket  
« Eva guin ardent' vel goazed,  
« Na gand aoun ma zavfe d'hor penn  
« E raf d'eomp koll or bigoudenn. »  
Mez ar voazed oar ho ardou  
Ziskenn d'ezho mellou banneou.

Ar vigoudenned gant ar joa,  
Ar van d'eo em jala :  
« Birviken n'hellimp va Doue,  
Eva ama eur seurt banne,  
Devi a ra ann odivi  
« Ec'h mennarguez, na eufomp mui. »

Ar voazed a lavar d'ezho :  
« Merc'hed paour, na vec'h kei mezo  
« Ne dal ket d'e-oc'h' h laret a'ou !  
« Vit eva eur banne, na daou :  
« Kemerit brema hoaz eunn all  
« Euz ho peg a z'ai ar vlas fall ! »

Goude oa evet daou vanne,  
Fonnauz re-all a ziskenne,  
Ha na oa mui gant-ho chistrou,  
Eve gullet mellou banneou,  
A odivi leun ar verenn,  
Hag ar goad ho sevel d'ho-fenn !

Mes ruz evel eteoioù tan :  
« Hon tro merc'hed a za breman,  
« Gouzout a rit, goazet, m'ervad,  
« Ema ganeomp foer Bont-n-Abad,  
« Ha varc'hoaz, ludik teir guech de,  
« Avalou-douar' vo adarre.

« Petra, va zud, a vo eved ? »  
« Netra, nemet kafe-koeffet, »  
« Eme ann holl dud enn eur vouez,  
« Henez ennomp' zigaso groez. »  
« Mes dija ca leun ho boellou  
« Ma zeu er meaz a vegadou.

Goazed, merc'hed a glask' neuze,  
Er meaz monet gant ho c'hafe,  
Mes diou, teir guech, gouezont en dro :  
— « Ni, gouazed, zo klaon, eme-z-ho. »  
— « Re marteze hon euz evet,  
« Evit klan ne d'oc'h ket, merc'hed ! »

Aoun braz am euz tont da facha  
Ann dud ve bet o tisheolia,  
Epad eunn nebeudick heuriou,  
Azezet eaz euz ann toliou,  
O lakat ar guer da zeni  
Hag ar goad enn-ho da virvi.

Euz ar mintin oen distagell,  
Ho fennou savet goal-huell,  
Brema gann gann ho flega,  
« Vit ar c'haouit' d'ar ziveia,  
« Var c'horre ho dillajou kaer  
« Da c'hortoz ma kouezfont er fletar !

Goazed ha merc'hed dorn-oc'h-dorn.  
Egiz pa velent dal pe vorn,  
A z'a da deuria ann henchou,  
Elec'h eler gant ho friou :  
« Petra ganeomp zo erruet ?  
« Me laka Fanch ez omp kouezet ! »

Ar vigoudenn lavar d'ar goaz :  
« — Dao eo d'eomp brema sevel c'hoaz,  
« Ma evpfont Fanch bep a vannik  
« Enn ti all, dran-doue ludich ; »  
Savet gant poan er meaz ar pri :  
Var eur bern mein var benn ho fri !

« Ma, boul-c'hurun, drant-doue brein,  
« Va flet teuz var eur bern mein,  
« Kignet va fri, n'oun nemet goët,  
« Te gast dran-doue a to koët,  
« Me am euz mez o vont d'ar ger  
« Kollet va broz, va zavancher !

N'euz ket pell c'houi a vouse'hoarze,  
Joaus enn eil ouz egile,  
Oc'h eva odivi melen,  
'C'hiz pa vije leaz dre zien,  
Ha brema teuit d'en emm dammal,  
Elec'h araok renker diouall.

Guella peuz brema da ober,  
Eo klask ho pros, ho tavancher ;  
Tenna euz o tillad ar pri ;  
Louzaouit mor gellit ho fri,  
Ha goulenn pardon ouz Doue,  
Nerz na evfac'h birviken re.

C'hui goazet klaskit o tocou,  
Chommet var ho lerc'h er poullou,  
Hoc'h izili torret aozet,  
Ar friou kignet louzaouet,  
Ha deskit c'hoaz en emm ziuouall  
Da eva re' benn ar vec' all.

## ÉVEILLEZ-VOUS

# ÉVEILLEZ-VOUS

---

Eveillez-vous la belle, (bis)  
Je viens vous avertir  
La patrie me rappelle  
Adieu ! il faut partir. (bis)

Ne verse pas de larmes (bis)  
Galant ne pleurez pas,  
Si vous prenez les armes  
Je ne reste pas là. (bis)

Ah ! reste-là la belle, (bis)  
Attendre mon retour  
Soit toujours fidèle  
Et aime-moi toujours (bis)

Ne parle pas d'attendre, (bis)  
Ce sera mon martyre  
Je ne veux pas comprendre  
Je suis prête à partir. (bis)

N'allez pas à la guerre, (bis)  
Car il faut trop souffrir  
On couche sur la terre  
Ça vous va mourir. (bis)

---

Je ne crains pas la misère, (bis)  
Ce n'est pas un tourment  
De coucher sur la terre  
Auprès de son amant. (bis)

Sur le champ de bataille (bis)  
Au milieu du danger  
L'éclat de la mitraille  
Pourrait bien vous tuer. (bis)

Sur le champ de bataille, (bis)  
Je ne tremble pas  
J'affronte la mitraille  
Comme un vaillant soldat. (bis)

Si cela vous contente (bis)  
Et vous fait bien plaisir  
Que je ne vous tourmente  
Je vous laisse partir (bis)

Quelle réjouissance (bis)  
Que d'être à votre côté  
Combattre pour la France  
Et pour la liberté. (bis)

# CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

## EUR MARTOLOD AG E VESTRES

VAR DON : *Ma petite Jeannette.*

Tud yaouanc testoit da glevet }bis  
Eur son so neve composet  
A so savet vit ar bla,  
Entre daou den yaouanc,  
Ag a deuo daou gant joa,  
A beb eill da barlant.

AR MARTOLOD, *outan e unan.*

Me a so eur martolod yaouanc }bis  
Allas ne meus na tad na mam,  
Zo ruillet a diruillet,  
Bars en créis ar mor don,  
Allies ar boan speret  
A ra din poan galon.

A c'hoas ar boan se ne d'he netra }bis  
Oh, en qever an ini m'o c'hoas,  
D'eus abers eur plac'h yaouanc,  
Sioas m'eus ré garet,  
Rag erve za zantimant,  
Vijemp qet separet.

Mes eur c'helou a m'eus recevet, }bis  
Ag a ra din cals a boan speret  
Laret so din abers mad,  
Penos n'am c'harie quet,  
Ag e ré diouin-me goab,  
A c'hos ne oëien qet.

Mar d'he gouir ar pec a m'eus clevet, }bis  
Var c'halc'ha baour a vo glac'haret,  
Mes q'et monet da gredi,  
Eur c'helou qet barbar,  
Vo red di en approuvi,  
Arog qever glac'har.

Me o'hoan nou eur bermission, }bis  
Ag a ra d'hoar sur dre drahison,  
Me a ra d'hoar er vro,  
E peba bit goëlet  
A neuse ne a velo,  
Ag e ra d'hoar trahisset.

C'hoas er ebars er vro, }bis  
O'hoar a peno e vo an dro,  
G'hoar a ra d'hoar un den yaouanc,  
O'hoar d'eus e zi,  
Breha ne avel patant,  
E m'hoar d'hoar va fri.

Mes n'eus fore red a vo din monet, }bis  
A gant d'hoar a renqo preseg,  
D'eus a ra o va mestres,  
Me sur d'hoar esponto,  
Gant calc'ha hardiequez,  
Demeus d'hoar reposiou.

AR MARTOLOD, *d'oc'h antren e ti e vestres*

Dehoar a joa va douc Jannet }bis  
Pella bras so ne m'eus qet o coëlet  
Gleven q'et d'eus o qelou  
Var bont va baitmant,  
Velen q'et o liserou  
Me a m'hoar n'hehamant.

AR PLAC'H

Estonet d'hoar on deus o coëlet }bis  
A cals m'hoar c'hoas d'eus o clevet  
Ma ne scrifen me qet d'ec'h,  
C'hoar a ra scrifec'h qet, din,  
Ag evel d'oc'h me moa lec'h,  
Da gaout cals a zourci.

AR MARTOLOD

Ya gouir d'ad e ar pec a leret }bis  
Mes credi a ran p'eut va zromplet  
Clevet m'eus bet abers mad,  
Var glaz a liserou,  
Penos rec'h diousin goab  
Pa oan pell d'eus ar vro.

AR PLAC'H

Oh, na mar gue dre foss qeloyou }bis  
P'eut recevet var o liserou  
Oc'h deut abeteg amant,  
Evit va approuvi,  
C'hom tranquil d'ec'h a laran  
Deut qen d'am frecanti.

AR MARTOLOD

Cals a raison a peut va mestres, }bis  
Rag me n'ho carin qen sur james  
N'he qet clevet gant tud all,  
E bet din ar rëson,  
Rag me aboc an deis all,  
O'hoar trahison.

AR PLAC'H

Oh, trahison sur me na rën qet }bis  
Mes dec'hui me na rëmein qet  
Rag goëlet a ran certain,  
Dirag va daoulagad,  
Penos p'eut d'eus o touguen,  
Eur marc'h ag a valé mad.

AR MARTOLOD

Var gezec me ne valean qet }bis  
Var ar plench me ne lavaran qet  
Mes c'hoar greg d'eur martolod,  
Ne vefet birviquen,  
Pe otramant e de lod,  
De m'eus ar chench souben.

## CANTIC

# SANTEZ ANNA VENET

*Var eun ton ancien.*

Kasset voa en eul leier gant daou den assistet,  
Rentet en Santez Anna pa e doa desirët :  
Evel ma yas en illis dirac Santez Anna,  
E kuitaas e braneillon, ma savas en he za.

Divale a ras d'ar guer bep den d'he assista,  
E braneillon a lezae dirac Santez Anna  
E maint c'hoas en illis neb den d'hoar coëlet

Mari ar Pension hanvet, euz a guer a Aire,  
En pad eus a c'hoec'h devez en poan a vugale  
Gant e friet voe goeslet dirag Santez Anna,  
Neuse, souden e c'henas eur mah ha vailanta.

He eur vaguerz yaouanc o vag eur c'hrouadur  
Da eur bourc'his a Noantet, comprenit ar maleur

481 B

Mes eur c'helou am'eus recevet,  
Ag a ra din cals a boan speret }bis  
Laret so din abers mad,  
Penos n'am c'harie quet,  
Ag e rē diouin-me goab,  
A c'hos ne oēien quet.

Estoulet  
A cals m'loc'h c'hoas d'eus o clevet }bis  
Ma ne scrifen me quet d'ec'h,  
C'houl'ra scrifec'h quet din,  
Ag evelloc'h me moa lec'h,  
Da gaoucals a zourci.

Var ar plench me ne lavarai quet,  
Mes c'houl' greg d'eur martolod,  
Ne vefet birviquen,  
Pe otramant e de lod,  
De m'eus ar chench souben.

## CANTIC

# SANTEZ ANNA VENET

*Var eun ton ancien.*

Me o supli, tud devot, da selaout a galon  
Eur c'hantie spirituel gant guir devosion  
A zo gret enn gloar Doue ag a vam ar Vere'hez,  
D'an Itron Santez Anna, hom guir advocadez.

Mes kent avañ davantaeb goulennomp ouz Doue,  
Ar zicour, an assistañ sklerijen eus an év.  
Dre intercession ar Vere'hez ag ar Speret-Santel  
Da gomposi eur c'hantie da gana ern Breis-Isel.

Me a gomz a eur plaç santel ag ansien meurbet  
Frekontret a bep kontre gant an dud affliget ;  
A Leon ag a Dreguer, a Guerne, a Goenet,  
A bevar c'horo ar brovinc' e teu pelerinet.

Pebes douster a zanter ag e pebes joa  
Pa vet ar belérnet en illis Santez-Anna ;  
Ankouraget e souden ezom qu'ha scouider,  
Né sonjer mui eus souffret na togrmant ma miser.

Oc'h antreal en illis pebes contantamant  
A zant en he c'hichen eno en eun instant ;  
O Itron Santez Anna ; emea, a greis calon  
Me en em brostern d'ho treid gant guir devotion.

Sellit en dro d'an illis eun niver tolennou  
Offret da Santez Anna en faveur ar voyen  
Gret er moment en danjer, ag a so exocet,  
Dre c'halloud man ar Vere'hez e pevar c'horn ar bed,

Dezir a meus bretonned, da ziscleria brema  
Ar miracl admirabl a ra Santes Anna ;  
En escopti a Voened, tostic da guer Alre.  
E man tensor precius d'hon c'horf a d'hon ene.

Jeannet ar Bescond hanvet a eskopti Goenet  
Españc demeus a zeis vloas privet d'eus ar c'herset.  
En em guestas gant fisianç ha guir devosion  
Da vont da Santez Anna euz a greis e c'halon.

Kasset voa en eol leñer gant daou den assistet,  
Rentet en Santez Anna pa e doa desirēt :  
Evel ma yas en illis dirac Santez Anna,  
E kuitaas e braneillou, ma savas en he za.

Divale a ras d'ar guer bep den d'he assista,  
E braneillou a lezae dirac Santez Anna  
E maint c'hoas an illis peb den ell o guele ;  
Meulet ravezo Jesus hag e Vam beniguet.

Marc'harit Costion, ive, a guichen Quimperle  
Zo bet pell bras lan guissant chomet var e guele ;  
Mes e zad e brometas eviti eun novel,  
En illis Santez Anna, me devise lec'het.

Var ben daou zeves goude ar plac'h-mâ a zavevas.  
Admirombl oll, chrēstienien, eur miracl so ker bras  
E deus gret Santez Anna en kichen Quimperle,  
En andret eur plac'h yaouanc e fete nōs a de.

A Vrest, eur soudard devot, e ano Sant Amda,  
O tremen ebars eur c'hoad en em gavas gantian  
Pevar forban debordet var an hent o laeres  
Hac a c'houlennas eun e yalc'h pe e vuaz,

Ar soudard, pa o c'hous a lavaras dezo :  
Me a zo eun tremen, ne meus quet a vadou,  
Hac a ya da bardonn da Santez Anna Voened,  
Mar he madeles Doue va lezet en yec'het.

Ar mest demeus a laçon a sistroas outi  
Gant ar vistolen karguet, en esper da laza ;  
Evel ma sonjas tennas o vrec'h outa zonnas,  
Ar vistolen euz e zorn d'an douar a goezas.

An tri lær all pa velleat voa brec'h o mest zonet,  
A c'houlouen ouz ar soudard hac en doa e sorcet.  
Salocras sur emean, n'en d'on quet eur sorcer ;  
Jesus da Santez-Anna am preserv dious maler.

Euz ar guever Rostredon, eur miliner yaouank  
Pe voa ho lemma e villa e toras ar palanc  
Ma chomas entre daou ven, ma sonje voa lazet :  
An itron Santez-Anna e deus en preservet

Dious ar mintin pa zave ha pa ze da gousquet,  
E pedez Santez Anna gan eur galon barfet  
D'he preservi dious maleur ha goal chanç er bed-mâ  
Choaset en devoa da Vam, Itron Santez Anna.

Mari ar Pension hanvet, euz a guer a Alre,  
En pad eus a c'hoec'h devez en poan a vugale  
Gant e friet voe goeslet dirac Santez Anna,  
Neuse, souden e c'henas eur mab ha vailanta.

He eur vaguerez yaouanc, o vag eur c'hrouadur  
Da eur bourc'his a Noantel, comprenit ar maleur !  
Eun devez o sortial allas ! ne sonje quet.  
Ma lezas ar c'hrouadur en e gavel kousquet.

O pebes tristidignes, glæ'har spont hac horrer !  
Pa zistro, er vaguerez da ziguerri he dor,  
Pa zellas ous ar c'havel, ar c'hrouadur vo enna  
Contammet gant eur penoc'h an anter anean.

Ha bi cōmanç da grial Itron Santez Anna,  
Petra deus da ober ! manquout a ra sempla,  
Allas ! me a vel patant et vin sur punisset  
Abalamour da c'hrouadur a zo ganen maguet.

Ar bourc'his quenta glevas, a laçq e c'hemaret,  
Rentet e memes amzer er prison a Naonet,  
Souden voe gaset e freces vit bea punisset,  
An Itron Santez Anna e deus hi preservet.

Lennet e voa dirazi gan rigor ar setañ ;  
Condæet gant ar bourreo da guichen ar potañ,  
Ha pignet e voa gantian betec ar vas huella,  
Eno ec'h apparissas neuze Santez Anna.

Kourach, emezi, va merc'h, n'ho peso drouk ebet ;  
Ar c'hrouadur a so yec'h en e gavel kousquet ;  
Me a so Santez Anna he guir advocadez,  
A boe an oad a zeis vloas em pedec'h alies.

Ar bourc'his mâ pa glevas voa e mab resocitet,  
A gommanças da grial evel eun den fetet ;  
Ed em strincas d'an daoulien evit gounten pardon  
Ous Doue ha Santez Anna eus a greis e galon.

Me so eun den miserable ha n'veritan quet  
Beza amâ en ho presañc d'an daoulin prosternet ;  
Me rañ aman enorabl en plaç ar vaguerez  
Hac a c'houlennou pardon eus va fallagriez.

Ar bourc'his a yas deuze da dy eun orfever  
Laquat ober en arc'hant form e grouadour quer,  
Evit digaç en offañc da illis Santez Anna  
A weler c'hoas an tanc'er en heur eus a vrec'h mâ

## AR PLAC'H

Nan martolod me né gemerit quet }  
 Rag aon na ven-me ampoësonet, }  
 Santout ran gant o tillat. }  
 Me gred c'hoës ar godron,  
 Va c'halon ne all qet pad,  
 N'ho qever ma mignon.

## AR MARTOLOD

Penos ta plac'h yaouanc dilicat }  
 C'hoës ar godron a zo eur c'hoës vad }  
 Dour godron a ve roët  
 Da merc'het eveld'hoë'h,  
 Evit espern o yec'het,  
 Ag e vent cals crënvoc'h.

## AR PLAC'H

Petra livirit d'in martolod, }  
 C'houi am c'hemer evid bea sod }  
 Dour godron ve qet roët,  
 Met dand dud potrinet,  
 A me n'hon qet ententet,  
 Dalbet o leuze'er.

## AR MARTOLOD

Oh, Jannedië potrinet oc'h sur }  
 D'eus a se d'ec'h me en assur, }  
 Var e bisach e merqet,  
 Liou a pevar blanquet,  
 O taoulagat coarennet,  
 O taouarn zo melen.

## AR PLAC'H

Lavarit din evel ma qerfet  
 Martolod me ne gemerit qet,  
 Rag cals ac'hanoc'h a ve  
 Souissou en o fen,  
 A song d'he ve o graguez,  
 O lampat er vouillen.

## AR MARTOLOD

O nebon bea zo cals anhe, }  
 Ag a blichefe d'he ober se, }  
 Mes c'houi plac'h yaouanc c'hoësant  
 Gant an oll admiretr  
 C'houi choaso ep nehamant,  
 An ini a garfet.

## AR PLAC'H

Va me a croas eur michero }  
 A ne ieio quet d'is d'an dour }  
 A ne m'ho ne nehamant,  
 Qen neubeut, gan speret,  
 Pa deuiou barioù tourmant,  
 Gant aon na ve beuet.

## AR MARTOLOD

Ya neuse neur gafed evurus,  
 Mes un tamic vead morched,  
 A mar labour bet er ger,  
 C'houi chome rest deun,  
 Cas vel eur gos comer,  
 Da zellet dioutan.

## AR PLAC'AH droug'enn

Arqa martolod clevit eta, }  
 A n'he qet a poën d'ech echui c'hoë }  
 It da glasc o patimant,  
 So en c'hoës ar mor bras,  
 Rag erve va zantimant,  
 Me n'he d'apfoë'h qet c'hoë

## AR MARTOLOD o cuitat e vest'es

Neuze eta plac'h yaouanc traïtour }  
 E c'han da bartia var an dour, }  
 En l'ec'h ma vit rusqellet,  
 Tolet a distolet,  
 Né laquin quet va speret,  
 Da zongéal er merc'het.

## AVIS

Me o ped martolodet yaouanc, }  
 Oh, ne laquit qet o zantimant, }  
 Da songéal n'ho mestrest,  
 Gant rê a garante,  
 Pe evel don vefed tromplet,  
 Ag o po queus goude.

## FIN

Ha Catel a Bris hanvet, eus a guer a Henbond,  
 A goas bars ar rivier, ma yas dindan ar pont;  
 Gant an dour he voa ruillet, ha ma voa dindana  
 Na bemzeg heur horolac'h abars dont aneze.

E mah guenta ma glevas e voa e vam koet,  
 D'an Itron Santez Anna, ganta a voe guetset,  
 Demus a dregont diner, eun oferen novet;  
 Ha dre c'hras Santez Anna ne daron drene chat

Bep meurs quenta eus a mis e kaer an ofis  
 En illis Santez Anna, ouepen ar sacrifice,  
 Evit consolasion an oll pelerinet  
 A deu da Santez Anna gan eur galon barfet.

Ar c'hoëc'hvet deiz varnuguen demus a vis gueren  
 E ma gouel Santez Anna hag ar solemnite  
 Gant ar Pab e zeus enni en deiz ze, accordet  
 An indetion qu'elles, varmission d'an pecc'het

sancta Anna, mater tua, ev qua sine macu a et peccato  
 processili Virgo Maria; exte antem natus est Jesus-  
 Christus, Filius Dei vivi. Amen.

Lavarit din evel ma qerfet  
Martolod me ne gemerie qet,  
Rag cals ac'hanoc'h a ve  
Sotissou en o fen,  
A song d'ha ve o graguez,  
O lampat er vouillen.

Neuze eta plac'h yaouanc trañtour }  
E c'han da bartia var an dour, } bis  
En l'ec'h ma vit rusqellet,  
Tolet a distolet,  
Ne laquin quet va speret,  
Da zongéal er merc'het.

Ha Catel a Bris hanvet, eus a guar a Henbond,  
A goas bars ar rivier, ma yas dindan ar pont ;  
Gant an dour he voa ruillet, ha ma voa dindana  
Na bemzeg heur horolac'h abars dont aneze.

E mab guenta ma glevas e voa e vam koet,  
D'an Itron Santez Anna, ganta a voe guetset,  
Demeus a dregont diner, eun oferen novet ;  
Ha dre c'hras Santez Anna ne devoe drouc ebet.

Ur vatimant marc'hadour, o tistrei a Vourdal,  
C'hoet dre eur bar tourmant, tolet var eur rohél,  
E voe etre an daou dour ar spaç a dri deves,  
E voe ar vartelodet e coljen o buez.

Un habiteo, skuiset bras hac e vartolodet,  
C'hoet holl da vervel euz a greis o yec'het,  
E voe stricjont d'an daoulin, da grial, da cœla  
E voe em recommandi d'hor mam Santez Anna.

E voe sur c'hart heur goude ober et oréson  
D'an Itron Santez Anna eus a greis ha c'halon,  
E voe mor eus en em sevel, al lest kerquent a fei,  
E voe eur miracle ar brassa e rivier a Naonet.

E voe vatimant perisset bars e creis ar mor don  
E voe equipach oïl beuzet, exceptet ar patron  
E voe gant var eur planquen a chomas seiz devez ;  
E voe dre c'hras Santez Anna e zovetas e vuez.

E voe illis Santez Anna a roas en bresant  
E voe gant demeus a vil scoet eur galon en arc'hant,  
E voe gant oüs pen-ze eun daulen guernisset eus a aour,  
E voe gant pevar guennec varnuguent a reas da bep paour.

E voe gant e capbl on christenien, da ziskleria brema  
E voe gant e ombre eus a miracleu a ra Santez Anna,  
E voe gant ar ar mor, var an douar, a quement plac' me feder  
E voe gant e pili a ra Jesus da bardon d'ar pec'her.

E voe gant Santez Anna ro certain ar guelet d'ar re dal,  
E voe gant d'ar re vud ar pariant clevet d'ar re vouzar,  
E voe gant e med d'ar re affliget d'ar re gam ar c'herzet,  
E voe gant e poula d'ar vugalegon, ha d'and dud clan hyec'het.

E voe gant ma e ma eur feunteun eus ar c'braçou Doue,  
E voe gant e recours yec'het d'ar c'horf ha bue d'an eoe,  
E voe gant e tout da goves enni ha da communia  
E voe gant e an deiz ou a so choaset eut e b'ita.

Bep meurs quenta eus a mis e keder an ofic  
En illis Santez Anna, ouспен ar sacrifice,  
E vit consolasion an oïl pelerinét  
A deu da Santez Anna gant eur galon barfet.

Ar c'hoec'hvet deiz varnuguen demaus a vis gueren  
E ma gouel Santez Anna hag ar solempite  
Gant ar Pab e zeus enni en deiz ze, accordet  
An indulj'ncou plener, remission d'ar pec'het.

Piou benac a govessayo hac a gommenio  
En illis Santez Anna an deiz-ze, a c'Ineo  
Pe gant deves a pardon o tout da lavaret  
Pemb *Pater* ha pemb *Ave*, recita eur chapelét.

O Itron Santez Anna ! ni o suppli hag a pet,  
Pedet evidomp Jesus en pates an Dri-gret,  
E vit goude hor maro ma zaimp oïl da repos,  
Gant ar zent hag an aëles en gloar ar barados.

A dost da Santez Anna sonj o c'hoec'h  
E zeus eur plac' a c'haç har hanvet e ar Verzerien,  
O quittä Santez Anna ho quënt traç an illis,  
Lavarit a greiz calon : *Pater, De profundis*, an

*Pedonnou hag Oressonou a gle ar Christenien da  
lavaret pere a song devoston da Santez Anna.*

Ho pezit sonj, o Santez Anna, Mañra gonsolation,  
penos ne voe clevet biscoas den o lavaret e-vije bet  
dilezet na refuset, ma teuje en affliction d'oc'h invog  
da d'ho pedi ar galon touchant ar penitant en deves  
bet recours dec'h, hac en deus goulennet oc'h assistanc  
He pedonnou a deu da vesa exocet gant hor Zalver  
Jesus-Christ : rac se e kemeromp esperanc ennoc'h  
evel a ra an dud clanv pere a den d'ho pisa. Ni en  
em adres dec'h eus a greiz hor c'hanon hac o reclama-  
mond humblamant. Accordit demp ar c'hraç da ellout  
eur vech jouissa euz ar gloar eternel. Amen.

*Quement quech ma lavarfet an Oreson a zo ama  
parlec'h, e c'honfet tregont mil bloas a pardon  
accordet gant an Tad Santel ar Pab Alexandr,  
da quement christen a zo er bed.*

Ave Maria gracia plena. Dominus tecum  
sit mecum ; benedictatus milleribus e benedictas sis

sancta Anna, mater tua, ev qua sine macu a et peccalo  
processili Virgo Maria ; exte antem natus est Jesus-  
Christus, Filius Dei vivi. Amen.

## PEDEN

Doue goll aloudus hag eternal, c'hui pehini oc'h  
eus deurezetrai Santez Anna eurus evit Mam da Vam  
ho mab unic, gret, ni o suppli, en eur enori e memoar  
dre an devosion fidel, ma obtenimp dre e meritou ar  
boneur fidel, ma obtenimp dre e meritou ar boneur  
eus ar vuez eternal, o c'hui pehini a reu e pad an oïl  
amzeriou.

# IAOUANKIZ KEMPER

## HA TRO VAR DRO

P'am euz kavet eunn tamm amzer.  
Eur bann liou, eunn tamm paper,  
Em euz sonjet sevel eur zon,  
Da dud va bro ha va c'hanton.

Gret eo'vit ar c'hisou neve,  
A veler goall stank o vale ;  
Dre ma zo darn anezho fall,  
Out-ho ve c'zomm da ziuall.

Va c'hoaz kenta zo d'ar merc'hed  
Da ziskouez penaoz int koefet ;  
Ama dreist holl e tro Kemper,  
Pa zeller out-ho e heuger.

N'euz mui a goefou var ho fenn ;  
Nemet heur begadik tien ;  
A zo hevel d'ouz tenn ar c'haz,  
Pa lez o fennou holl e noaz.

Gant ho bleo enn ho daoulagad,  
Ouz keban int henvel m'ervad ;  
Guintet ho c'hoefik var ho chouk,  
Lavaret ve vent vont d'ar groug.

Ouspen, ho goug zo dizelo,  
Gant chadenn vont enn-dro d'ezho  
Ha var ho daouarn manegou,  
Seuliou triz dindan ho boutou.

N'ho daouarn a zo dise'hlaouer,  
Ha pa ve tom, ve disheolliou ;  
Zo ho hano parapluiou,  
Ann diveza parasoliou.

Faë eo gant-ho komz brezonek,  
Koulz koude zrollont ar gallek ;  
Kaer deuz goaska ho muzellou,  
Ober chistrou gant ho ginou.

Ne d'int'met tammou mitien,  
Pe merc'hed c'hoaz da ostisien ;  
Krampoezerezed, ferrezed,  
Lavaret ve intronezed.

Pa zilez va fiac'h he golvez,  
Ve songet e ve eur gontez ;  
Gant ar perlez o lugerni,  
Veler-ker stank enn dro d'ezhi.

Keginerez ha plac'h a gampr,  
A zo out-ho goall-rust ann-tamm.  
Betek merc'hed ann nadoiou  
A renker gervel mamzellou.

Eur viltans eo sur ho guelet  
Dre vrac'h'vel pa vent dimezet.  
Gant iant-zoudar i ha mansouner,  
Gant kere ha gant boutaouer.

Eur vech brema ve deut deoc'h  
Hag eat ho mistri da repos,  
Kalz plac'hed guita ho zier  
A zeui enn dro'raok ma saver.

D'ann ostaleri, d'ar c'hafé,  
Kalz ia da eva eur banne ;  
Savet gant-ho huel o fenn,  
Skoaz, ha skoaz gant ar vourc'hisien

Araok eva ho banneou,  
Va merc'hed rai kalzik, taillou ;  
Mes eur vech evet daou pe dri,  
Ne vo gant-ho tamm chistrou mui.

Savaret'reont ken divergont,  
Odevi, kafe à lonkont,  
C'hoarzin ha gourdrouz bep eil tro,  
Dizale'vad ni ho guelo.

Diskennet int ebarz er ru,  
Kroazigella'reont enn daou du,  
N'hellont mui ober ho chistrou,  
Ouspen, koll a raint ho c'hoefou !

Poentezeodhorc'h merc'hed Kemper,  
Dilezel krenn p'hoc'h euz amzer,  
Ann henchou fall, ho koall vue,  
Evit servich mad ho Toue.

Ehañ a-ran gant ar merc'hed,  
Breman z'eomp da vad d'ar goazed ;  
Da velet hag int zo furoc'h,  
Pe marteze zoken sotoc'h.

Lellit out-ho var ann dachenn,  
Neudet brao tre eo ho chupenn,  
Lugerni ra gant ann neud sei  
Ar voulouz du, a-zeou, a-glei.

Bragezet mad ez int ive  
Ha chiletennet à zoare.  
Gant eunn tok bordet var ho fenn,  
Eur roued neudet n'ho c'herc'hen.

Chadenn ha mont'zoug ar baotred,  
Enn ho zreid c'hoaz boutout ciret,  
Sigarenn, pibenn zo n'ho bek  
Distaga reont spésiou gallek.

Eunn dra a gaver divalo,  
A ra lod a c'hoazed ar vro,  
Eo n'ho bek lakaat eur chikenn.  
Da zerc'hel sonj euz ar chukenn.

Gant eur banne dindan ho fri  
Ho gueler enn ostaleri ;  
Ar c'hlaouren rous tont dioc'h ho bek  
Ha mil boar d'ar baotred c'hoaz preg

Ho pennou oa savet huel,  
Hag ho teod a oa distagell ;  
Brema nari'met balbouzat  
Louz ho pek ha skeulf ho lagad.

Horjella a rit adarre,  
Ann dud a gred peuz evet re !  
Koueza rafot var ann dachenn  
Ha saotret a vo ho chupenn

A fors da eva, da c'hlaouri,  
Va faotred zo kouezet er pri !  
Silabezet deuz ho chupenn c'hlaz  
Kollet ho zok 'maint e penn noaz !

P'oa kouezet va faoutred iaouank,  
Siouaz ! d'ezho, e kreiz ar fank !  
Penn o fri a oa bet skignet,  
Gant ho dillad koll kaillaret !

Ha c'hoaz ann dud a oa enno,  
Lec'h ho sevel, c'hoarze d'ezho,  
Ouz ho guelet o tivoad,  
Lec'h ve ar moc'h en em zaotra !

Lavaret rejout da Laoutk,  
Koulz a d'he vignoun keaz Iannik  
« Poen peuz paotred n'hoc'h izilli,  
« Dao eo sevel raok koueza mui.

« Da bardonna, da frikota,  
« Z'it gant dillad euz ar brava,  
« Penaoz d'ar gear zeuit diskabell,  
« Gant ho pennou stouet izel ?

« Dispignet peuz sur hoc'h arc'han  
« Var ar briz, kollet ho-skiant,  
« Hag evitho peuz bet netra,  
« Nemet ho tillad da zec'ha !

N'eo ket difennet gant Doue,  
Diouz sec'het eva eur banne ;  
Arabad 'vad ez eo krevi,  
Pa gaver mad ann odevi.

Dilec'h ar moc'h jom restaichou,  
Ha var lerc'h ar zaout ar griou ;  
Penaoz eta skouezfe ann dud,  
Izeloc'h'vit al loened mud ?

Guelet rer loenet pevar droad,  
O rei d'ann dud eur gentel vad ;  
Rak n'ho c'haver ket astennet  
Var ann hent goude d'he debret.

Ouzpenn garont ho revian,  
Miret reont n'ezho ouz ar boan ;  
Lec'h veler ezech oa gragez,  
Lezel ho re enn dienez.

Kalz merc'hed ha kalz a c'hoazed,  
A gredo m'o ho dikriet,  
Dre ma m'euz skoet var ho friou,  
O sonjal skei var ar c'hizou.

Mes piou bennak a zello mad,  
Gant-han digor he zaoulagad,  
A velo sklear ann disursiou,  
Er vro deut da heul ar c'hizou.

Greg bugale gant mesventi.  
Gaver aliez o c'hlaouri ;  
Gant ho zud siouaz ! dilezet,  
A zesk eo guir'r pez m'euz laret.

— FIN —

DEDIET D'AN AOUTROU 'N ESKOP KEMPER A LEON

# KANTIK

EN HENOR

Roñt ive, d'hon tud yaouank  
Vaillantiz hag an henor  
Da zifen, e pep bro a stank  
Gloar ar Frans, hag an Arvor.

Da harpa guiriou au Iliz,  
Var sao ! hon dalc'hit bepret,  
Da ziskouez sklear hag e pep giz,  
Ez omp c'hoas guir Vretouned.

Ho pennoz hag hini Jezus,  
Da veleien hor parrez,  
Gras deomp da heulla ho vertuz,  
Var hent ar guir zantelez.

Euz ho madoberou karget,  
Ni lavar a vouez huel,  
Kentoc'h vit mankout d'o karet,  
Et kersomp guelloc'h mervel.

Faç eo gant-ho komz brezonek,  
Koulz koude z'alliont ar gallek ;  
Kaer deuz goaska ho muzellou,  
Ober chistroù gant ho ginou.

Ne d'int met tammou mitien,  
Pe merc'hed c'hoaz da ostisien ;  
Krampoezerezed, ferrezed,  
Lavaret ve intronezed.

Diskenn  
Kroazigella'reont enn daou du,  
N'hellont mui ober ho chistroù,  
Ouspenn, koll a raint ho c'hoefou !

Poentezeod hore'h merc'hed Kemper,  
Dilezel krenn p'hoec'h euz amzer,  
Ann henchou fall, ho koall vue,  
Evit servich mad ho Toue.

Siouaz ! d'ezno, e kreiz ar tank !  
Penn o fri a oa bet skignet,  
Gant ho dillad koil kaillaret !

Ha c'hoaz ann dud a oa enno,  
Lec'h ho sevel, e hoarze d'ezho,  
Ouz ho guelet o tivoada,  
Lec'h ve ar moc'h en em zaotra !

Gant ho zud siouaz ! dilezet,  
A zesk eo guir'r pezh m'euz laret.

— FIN —

DEDIET D'AN AOUTROU 'N ESKOP KEMPER A LEON

## KANTIK

EN HENOR

### DA ITROUN VARIA AR PORZOU

Kurunet e Kastel-Nevez-ar-Faou

26 a viz Eost 1894

TON : *Unis aux concerts des anges.*

Euz a Vrest e teuomp adarre  
D'hor chapel dous ar Porzou  
De kuruni, Mam da Zoue !  
Leun a jor hor c'halonou.

#### DISKAN

Guir vugale Kastel-Nevez  
Unanomp hor pedennou  
Hag kurunomp gant karantez  
Hor Rouanez ar Porzou.

Abaoue hor bugaleach  
Ez omp bet deoc'hui gouestled  
A breman e kreiz hor beach.  
Skuiz, meurbet, omp diztroet.

Da zikouez d'hor Mam bursudus,  
Hon ezommou, hon anken.  
Evit goulenn graçou nerzus,  
Da jom bepret kristenien.

An Iliz a zo goal gasset  
Tenn ac hurr eo ar brezel,  
Evel varmor Genezareth,  
Dirollet eo an avel.

Deomp-ni an dud fall a lavar :  
« Ho Salver a zo kousket  
« Ober a ra skouarn-vouzar  
« Ho lest a veso beuzet. »

Diskouezit d'hon enebourien  
Eo dihun Doue hon Tad,  
Hag a clev Jézus ho peden  
Pa vez poent ho skei da vad.

Hon tadou coz, pennoù kalet  
Evel kerrek Breiz Izel  
A viskoaz a zo bet brudet  
Kristeniet stard a fidel.

Dalc'hit sonj o mam da Jezus !  
Ez omp an heritourien,  
Euz o furnez, euz o vertuz,  
Euz o feiz, henor ar voen.

Vit derc'hel mad d'o feiz kalet  
Vit kerzel var ho roudou,  
Pellañ diouzomp ar pec'het,  
Ar goal dentationou.

Bezit etat gant hor Zalver  
E pep tiegez kristen,  
Hag unanite pep micher  
Mistri ha labourerien.

Rentit deomp-ni da virviken.  
Doue da Vestr er skoliou,  
Enne zoujans hag e lezen  
Savit hor bugaligoù.

Roit ive, d'hon tud yaouank  
Vaillantiz hag an henor  
Da zifen, e pep bro a stank  
Gloar ar Frans, hag an Arvor.

Da harpa guirioù au Iliz,  
Var sao ! hon dalc'hit bepret,  
Da ziskouez selear hag e pep giz,  
Ez omp c'hoas guir Vretouned.

Eur zell ive, Guerc'hez Vari !  
Var hon tud coz daoubleget,  
Eun o foaniou, enn ho c'hozni  
Biken n ho dilezit ket.

Skuillit ho pennoz, Mam dener !  
Var hon tad Leon Trizek  
A var Aotrou'n Eskop Kemper  
Hor pastor mad a karet,

Skoazel c'hoas d'ann holl eskibien  
Mignounet an Eneou  
Hag ive d'ann holl veleien,  
Bodet hirio ar Porzou.

Ho pennoz hag hini Jezus,  
Da veleien hor parrez,  
Gras deomp da heuilla ho vertuz,  
Var hent ar guir zantelez.

Euz ho madoberou karget,  
Ni lavar a vouez huel,  
Kentoc'h vit mankout d'o karet,  
Et karfemp guelloc'h mervel.

Kenavo, Introun ar Porzou !  
Hor Rouanez krunet,  
Kenavo, sourcen a c'hrasou,  
Mam dous a muia-karet.

Mar bez pur a mad hor buez,  
Mar bez santel hor maro,  
Jesus var pazen he balez,  
Deomp-ni holl a lavaro ;

« Guir vugale Kastel-Nevez  
« Fidel d'hor Mam ar Porzou,  
« Bezit breman, a da jamez,  
« E c'hurunen enn Envou ! »